

Ar c'hemenerez ag ar prinç.

Debouchour deoc'h kemeneres
 Dond a rafferc'h da griat dam palez
 Na da griat ar lien fin
 Dober rochedou dan Dauphin.
 – Me n'en don ket kerkouls desket
 Evit griat da Dauphinet
 Me ne c'hrian nemet dar gommun.

Ar prinç Dauphin a lavare
 Er gher de vam pa errue

–

Na nen de ked Kerkoulz desket
 Evit gria da Dauphinet
 Mes ne chri nemet dar gommun

Kid o unan petek eni
 Na kredo ked o refusi

–
–
–
–

Debonchour dec'h kemenerez
 Meurbet e zoc'h gloriuses
 Meurbed e zoc'h gloriusez
 Ne deufec'h ked da gria d'am palez
 Na da gria lien moan
 Dam mab Dauphin a din va unan
 Na ne griet nemet dar gommun

Ket tu dar gher eb servi mad
 Da prepar ar plaç da griat.

–
–
–
–

Ar prinç Dauphin a pourmene
 Deus an eil pen kamb de ghile.
 Ar kemenerez eo a ouele

Ar Prinç Dauphin e remerke.
 – Me nen don ket ker kouls tesket
 Evit gria da Dauphinet
 Me ne grian nemet d'ar gommun.

Kemenerez din leverit
 Na perag e tra(2) na voelit.

—

— me nen don ked ker koulz tesket
 Evit gria da Dauphinet
 Me ne grian nemet dar gommun.

Kemenerez din livirit
 Peghement ar bloas a touchit
 Me ne touchan ked a leve

Nemet ma zri gwenek bemde
 Beva gato gant graç Doue
 Deus an eil ti mad de guile,
 Me ne grian nemet d'ar c'hommun.

Domach eo na touchit ked a leve
 Kapabl eoc'h da eureuji eur Roue
 Nag a reoc'h tu gant graç Doue.

—

—

—

Ar kemenerez zo sortiet
 Ar prinç Dauphin zo bed klanvet
 Gant klinvet an amourouset.
 Ar prinç Dauphin a lavare
 Dar gher de vam eun de a voe :
 Klaskit ar belek dam noui
 Pe ar kemenerez dam eureuji.

*Sur le folio 18 r., il n'y a seulement que le titre suivant (écrit au crayon) :
 Ar c'hemenerez ac ar prinç Daupin.*

*Les points remplacent des lignes tracées au crayon (dans le ms.),
 indiquent que les vers manquent.*

(1) Les folios 19 recto et 20 recto sont laissés en blanc.

(2) Ms : e tra ; lire : e ta (?).